

« Diwar c'hoari kelenn »

C'hoariomp

I. - Distro ar Prizonier

II. - En em garit...




*Hep eur begad pebr hag holenn
Eo meurbet goular ar zoubenn.
Evel-se ma n'ho peus bemdez
Nemet labour tenn hag enkreuz,
E vo dihlaz ho tervezion ;
Ret eo plijadur awechou.*

(Y. WILLOU.)

FB
831.
82
CHO

10697



C'HOARIOMP



Distroñ ar Prizonnier

Pez-c'hoari en eun arvest
(evit ar wazed)



En em garit...

Pez-c'hoari en eun arvest
(evit ar merc'hed)



*Embannet gant Kevredigez «Yaouankizou Kristen ar Maeziou»
Eskopti Kemper.*

(Straed Feunteunig-ar-Lez, Kemper.)

Kemper, Moulerez ru an Dudenhentil, 7

1942

891
682
CHO

M. Marse
1016

Distro ar Prizonier

Pez-c'hoari en eun arvest (evij ar wazed)

ROLL AR C'HOARIERIEN :

Fransa, an tad-koz : 75 vloaz.

Lan, an tad : 40 vloaz.

An diavaeziad (Lan).

Per : 12 vloaz,

Yannig : 10 vloaz,

Gaidig : 8 vloaz,

Cheun, ar mevel koz : 70 vloaz.

Fanch, ar mevel : 17 vloaz.

} bugale Lan.

(An abadenn a dremen en eun tiegez war ar maez, er gegin bras. Eun oaled, eun daol gant skinvi, eun orolaj pras, eur bufed, eur gwele-kloz, ma karer. War an deaz-wele pe war ar bufed, poltrejou ha skeudennou, en o zouez skeudenn ar Werc'hez ha poltred tud eur friko-eured. An oaled a vo e-kostez, tostik da ziaroek al leurenn ; an daol a vo he fenn — ha n'eo ket he c'hostez — troet war-zu ar zal.)

DIVIZ KENTA

(An tad-koz a zo azezet e korn an oaled, troet war-zu an dud ; o vutunat eman e-serr entent, quz an tan. Eur c'haz a zo o tommet etre e voutou. Gaidig a zo o c'hoari gant eur volo-fenn.)

AN TAD-KOZ (*da C'haidig.*) — Chom frankil 'ta ! A-benn ar fin e ri gwasoc'h eget paouez ! Pa 'z pezo torret eun dra bennak e vezi aesoc'h, neketa ? War zigarez n'eman ket da vamm war al lec'h e rankez ober da zodez... ha war zigarez n'eman ket da dad er gêr ! Bez dinec'h ! gant al lizer kenta a vezo skrivet d'ezan e klevo peseurt penn-fall a rez.

GAIDIG (*he deus selaouet mezek ; dilezel a ra he bolotenn ha dont da ober chourig d'ar c'haz. D'he zad-koz.*) — Peur e teuio Tad d'ar gêr, Tad-koz ?

AN TAD-KOZ. — An Aotrou Doue a oar, va merc'hig !... Diouz ma lakae war e lizer diweza n'eo ket lavaret e talefe kals mui. Setu tri bloaz 'zo pe dost abaoe n'hon eus ket e welet. N'oun ket nec'het ez po poan ouz e anaout pa erruo, Gaidig !

GAIDIG. — O ! n'em bo ket Tad-koz ! Me a lammo da bokat d'ezan.

AN TAD-KOZ. — Kae 'ta da gerc'hat d'in ar poltred a zo aze war an deaz-wele ma vo gwelet, poltred friko-eured da dad eo.

(*Gaidig a ya da gerc'hat ar poltred hag hen ro d'he zad-koz ; sellout a reont o-daou outan.*) Piou eo heman ?

GAIDIG. — Tonton Kaour !

AN TAD-KOZ. — E pe-lec'h eman Tonton Kaour ?

GAIDIG. — En Almagn, Tad-koz.

AN TAD-KOZ. — Hag houman ?

GAIDIG. — Tintin Marianna.

AN TAD-KOZ. — E pe-lec'h eman Tintin Marianna ?

GAIDIG. — Er Baradoz, Tad-koz.

AN TAD-KOZ. — Hag heman ?

GAIDIG. — C'houi eo Tad-koz, gant o tilhad da zul.

AN TAD-KOZ. — Ha Tad neuze, pehini eo ?

GAIDIG. — Heman, Tad-koz. (*Diskouez a ra poltred he zad gant he biz.*)

AN TAD-KOZ. — Ro eur pok d'ezan 'ta ! (*Gaidig a ro eur pok d'ar poltred.*)

GAIDIG. — Peur e teuio Tad d'ar gêr ?

AN TAD-KOZ. — Ma karfemp pedi muioc'h, marteze e teufe kentoc'h.

GAIDIG. — Tad-koz, me 'zo o vont da lavarout va fedenn da Itron-Varia 'r C'hoad-Glas...

AN TAD-KOZ. — Ya lavar-ta, Gaidig !

GAIDIG (*a ya da zaoulina war ar leur-zi dirak skeudenn ar Werc'hez ; an Tad-koz a zav en e he zav hag a denn dog.*) — « En hano an Tad hag ar Mab hag ar Spered-Santel. « Itron-Varia 'r C'hoad-Glas, me ho ped, beilhit war va zadig paour a zo du-ze en Almagn, pell diouzomp. Plijet ganeoc'h hen diwall ouz pep droug en e gorf hag en e ene hag hen digas d'ar gêr ar c'henta 'r gwella. Evel-se bezet graet ! »

« Me ho salud Mari... Evel-se bezet graet ! »

AN TAD-KOZ. — Evel-se bezet graet ! (*Lakaat a ra e dog hag azeza. Gaidig a zeu da azeza en e gichen. Sellout a ra an Tad-koz dre ar prenest. Outan e-unan.*) Ha glao atao ! eur pil dour ! Berc'hed ne vo ket eun neudenn zec'h warni gant an amzer-man. Kaer em eus bet klask mirout outi da vont d'ar park... ya moarvat ! netra da ober ! N'eo ket evit he zech ! Hag he fenn hec'h--unan a rank da ober, mardouen !... N'eus nemet eun dra en he spered : arabat e ve netra a-dreuz na netra diskempenn pa zigouezo Lan ! N'em bije ket kredet he dije gellet harpout ! (*Sellout a ra ouz an orolaj. Outan e-unan.*) Peder eur ! Poent eo d'in mont da rei o merenn-vihan d'ar zaoud. (*Gaidig a ra van da vont d'e heul.*) De avat, chom en ti, an amzer evel m'eman ! Arabat eo d'it mont re dost d'an tan na terri netra. Va biz bihan a lavaro d'in ! Ma vezes fur e teuio Tad d'ar gêr kentoc'h. (*Mont a ra er maez.*)

DIVIZ II

GAIDIG HEC'H-UNAN

(*Gaidig a c'hoari adarre gant he bolotenn... Dont a ra da zellout ouz ar poltred a zo war an daol.*) Ha Tad-koz a lavare d'in ne anavezfen ket Tad pa deuje ! Nann kredabl ! Eun den brao eo va zad, bravoc'h eget hini all ebet eus ar re a zo war ar poltred... gwisket, kran... eun tamm mourenn zu d'ezan... aes e vo da anaout ! (*Eur pok a ro da boltred he zad.*) Me am eus choa ouzit tadig ! deus 'ta buan d'ar gêr ! (*Trei a ra he daoulagad war-zu skeudenn ar Werc'hez.*) Daoust ha ma lavarfen eur wech c'hoaz va fater ! (*Mont a ra d'an daoulin dirak skeudenn ar Werc'hez hag e stag gant he fedenn*) : « Itron Varia 'r C'hoad-Glas... »

DIVIZ III

GAIDIG, EUN DIAVAEZIAD

(*A-vec'h m'eo staget Gaidig gant he fedenn ez eus deuet eur gwaz tre en ti, didrouz, hep lavarout netra. Baro hir en deus, sammet eo gant muzetennou ha pakajou, tres ar skuister a zo warnan ; chom a ra a-zav e-kichen an nor... E zaoulagad a ra tro ar gegin, chom a reont da bara war C'haidig... P'eman Gaidig o staga gant he « Me ho salud Mari... » e klev eun trouz bennak, trei a ra he fenn... gwelout a ra an diavaeziad, pabuez a ra gant he fedenn ha mont dem war-adrenv betek korn an oaled en eur zellout piz ouz an diavaeziad. Tostant a ra hemañ war e bouez.*)

GAIDIG (*ankeniet*). — Tad-koz a zo er c'hraou ! (*An diavaeziad a ya atao war-a-raok... Gaidig, tres an nec'hamant warni, a ra van da vont da gavout an nor.*)

AN DIAVAEZIAD (*a harp anezi ha gant eur bouez dous*). — Pe hano out-te plac'hig !

GAIDIG (*dizammet eun nebeud*). — Gaidig !

AN DIAVAEZIAD. — Peseurt Gaidig ?

GAIDIG. — Gaidig ar C'hoad-Glas.

AN DIAVAEZIAD (*outan e-unan*). — Kresket eo memes tra ! yac'h ha krenv he deus an aer da veza. (*Da C'haidig*) : N'ouzout ket piou oun-me ?

GAIDIG (*ankeniet*). — Tad-koz a zo er c'hraou !

AN DIAVAEZIAD (*outan e-unan*). — Tri bloaz 'zo pe dost n'he deus ket va gwelet ; n'eo tamm souez ha goude n'am anavezfe ket ! (*Da C'haidig*) : Gaidig, va merc'hig vihan, ne anavezef ket da dadig ?

GAIDIG (*a nij an nec'hamant kuit di-war he dremm, laouennaat a ra en eun taol hag ez a a-lamm gant e zad*). — O ! tadig paour ! (*Pokat a reont an eil d'egile. Mont a ra an tad gant e verc'h betek an daol, azeza a reont.*)

AN TAD. — Doueti a raen atao n'ez piije ket va anavezet.

GAIDIG. — Ho paro hir eo a zo kaoz hag ho tilhad.

AN TAD. — Me kennebeut n'em biije ket anavezet va Gaidig vihan... na te zo kresket. (*Fri-du — ar c'hi — a zeu di-war-herr war al leurenn hag a lamm gant e vestr.*)

AN TAD. — Ata, Fri-du ! te n'ez peus ket ankounac'haet da vestr, han ! Diouz va mouez out aet d'in neketa !... (*C'hoariellat a ra gant ar c'hi.*) (*Da C'haidig*) : E pe-lec'h emañ Mamm ?

GAIDIG. — Aet eo d'ar park. Ha c'hoaz n'eo ket gwir, hirio eo aet d'ar marc'had.

AN TAD. — Alies e vez mamm er park ?

GAIDIG. — O ya ! ken alies ha bemdez pe dost, diouz an abardaez ; Tad-koz a oar farda merenn-vihan d'eomp hag entent ouz al loened.

AN TAD (*outan e-unan*). — Tregas a-walc'h he do bet Berc'hed aman e-pad tri bloaz ! Ni, du-ze, n'oa ket gwall avius hor stad... ar re a oa chomet er gêr n'eo ket bet gwall ebat o doare kennebeut ! Ni eo hor c'halon a veze gwasket, hor spered drebet... Klenved ar gêr a groge ennomp... sonjal er gêr, er wreg, er vugale, er parkeier, el loened... chom hep goût peur ha penaos e vefe fin d'an abadenh... Netra

da ober nemet laerez an amzer... Hag e-keit-se edo ar re fall : ar vugale, ar merc'hed, ar re goz... o terri o c'horf... Ha gant amzeriou evel hirio ! (*Sellout a ra dre ar prenestr.*) Teil e vo ar paour-kaez Berc'hed pa erruo er gêr ! (*Da C'haidig*) : Ha Per ha Yannig, e pe-lec'h emaint ?

GAIDIG. — D'ar skol int aet.

AN TAD. — Te ne vezez ket er skol ?

GAIDIG. — Eo ! nemet hirio oun chomet er gêr abalamour m'oa fall an amzer.

AN TAD. — Petra vez desket d'it er skol ?

GAIDIG. — A bep seurt : lenn, skriva, kana, pedi...

AN TAD. — Kana 'ouzout ivez ?

GAIDIG. — Ya !

AN TAD. — Kan eun dra bennak d'in 'ta !

GAIDIG. — Pe-seurt son ? « Ar Gwennelenn » ?

AN TAD. — N'eus fors pehini !

(*Gaidig a gan son « Ar Gwennelenn » pe eur zon bennak all evit ar vugale.*)

AR GWENNELENN

I

Me am eus savet
Eun tamm kanaouenn (*bis*)
Hag a vo kanet
D'am zad en anken.
Du-ze prizoniet
War en douar estren.

II

D'am zad er prizon
Setu va lizer (*bis*)
Stummet 'vel eur zon
Nerzus ha tener
Da rei d'e galon
Fizians da zont d'ar gêr.

III

Mezvet a frankiz
'Nij ar gwennelenn (*bis*)
Warni tiz ha 'tiz
Da dapa keilhaen...
Morse tamm diskuiz
En he zuteladenn.

IV

Allas ! Gwennellig
A zo bet paket (*bis*)
Gant eur bugelig
Hag en deus laket
Ar c'haez labousig
Da loja 'n eur gaoued.

(1) Ton : « Me em eus paket eul labousig gwenn ». Sonion Feiz ha Breiz, Trede levr.

V

« Kouls eo d'in mervel ! »
'Zonj ar gwennelenn (*bis*)
N'helle ket herzel
Ouz he flanedenn,
Pa glev o c'hervel
Mouez ar frankiz laouenn.

VI

Setu, dre vuzud,
Torred 'n orjelenn (*bis*)
Ha digor ar glud

D'ar c'haez gwennelenn...
Echu he zurlud
Hag hi libr da viken !

VII

Klevit ho pugel
Va zad en harlu (*bis*)
Eun deiz an orjel
A droy e ludu
Ha, fin d'ar brezel,
C'houi 'zeuy d'ar gêr dioustu.
(*Savet gant F. GUÉGUEN.*)

AN TAD. — Kana 'ouzout avat ! ha kaer eo da gannaouenn ! Oc'h ober petra edos p'oun en em gavet ?

GAIDIG. — O lavarout va fedenn da Itron Varia 'r C'hoad-Glas.

AN TAD. — Ne vijes ket kontant d'hel lavarout eur wech all ?

GAIDIG. — N'eus ket ezomm ken, peogwir oc'h deuet d'ar gêr.

AN TAD. — Lavar 'ta, memes tra, eur wech all c'hoaz, evit trugarekaat an Aotrou Doue hag ar Werc'hez hag abalamour d'in d'he c'hlevout.

GAIDIG. — Neuze a rankan mont war va daoulin, evit-se, dirak skeudenn an Itron Varia.

AN TAD. — Evel just avat !

(*Kuitaat a ra Gaidig an daol, daouлина a ra war al leur-zi hag e lavar he fedenn penn-da-benn hep ar « Me ho Salud Mari », « Itron Varia 'r C'hoad-Glas... » (An Tad a zo savet en e zav, tenna 'ra e dog ha stoui e benn... Kemerout a ra e vouchouer-fri evit se'ha e zaoulagad ha c'houeza e fri: Goude m'he deus lavaret ar plac'hig : « Evel-se bezet graet ». An Tad ivez a lavar : « Evel-se bezet graet. » Gaidig a zeu adarre da gavout he zad.)*

AN TAD (*a ro eur pok d'ez*). — Brao eo da bedenn, Gaidig ! Piou en deus he desket d'it ?

GAIDIG. — Mamm ! Ha bemdez hel lavaremp asambles — Per, Yannig ha me — pa vezemp gant ar grasou. A-wechou mamm a ouie gouela pa vezemp oc'h ober ar bedenn-se...

AN TAD. — Breman da vihana n'he do mui tro da ouela. (*An Tad a dro e benn, n'en deus ket a c'hoant e welse e verc'hig anezan o ouela.*) Gaidig ! kae 'ta da lavarout da Dad-koz oun erruet. (*Gaidig a ya er maez.*)

DIVIZ IV

AN TAD E-UNAN

(*C'houeza 'ra e fri ha sec'ha e zaoulagad.*) Re sot oun kement-se ! mont da ouela breman ! Setu aze petra eo ar Vro... ar gêr... ar vugale... klevout bugale o kaozeal, o kana, o pedi e brezoneg... c'houek eo an holl draou-se d'ar galon ken n'he deus ranket dic'hlan... Keit-all 'zo oan dizounet !

(*En em zizamma 'ra eus e vuzetennou... Sellout a ra en-dro d'ezan...*) N'eus chenchet netra ! Evel pa vijen aet kuit deac'h... (*Gwelout a ra ar poltred chomet war an daol, paka 'ra peg ennan ha sellout outan.*) Eun dervez kaer oa bet hennez ! dervez hon eured !... ha bet kalz derveziou eürus d'e heul !... Sell Berc'hed en he c'haer !... Koant oa d'an ampoent, koant eo chomet, nemet neuze ne anavezen ket gened hec'h ene, madelez he c'halon, pinvidigeziou kuzet ouz va daoulagad a baotr-yaouank ha dizoloet nebeut a nebeut dre ma kavent tro ha dre ma figore va daoulagad. He lizeri eo !... Ni, tud diwar ar maez, a zo eur bern traou ha na zeont ganeomp nemet dre lizeri... Gwella pezh 'zo em eus gellet o digas ganen, al lizeri-se. O lenn a raimp asambles. Me a gav d'in oun bet re zichek en he

c'henver meur a dro a-raok ar brezel ha re zizeblant. Digoll a raimp an amzer dremenet. (*Lakaat a ra ar poltred en e blas.*) Moarvat eo kastizet eun tamm-mat gant ar vuhez a ren abaoe tri bloaz ! (*Sellout a ra er sklaseenn.*) N'oun ket souezet em bije graet aon pe dost da C'haidig ! gant eur penn evel-se ! eur penn reder-henchou ! Pa 'm bezo lammet va baro e vezin doareet gwelloc'h !

DIVIZ V

AN TAD, AN TAD-KOZ, GAIDIG

GAIDIG (*o tont diwar-herr en ti*). — Eman Tad-koz o tont !

AN TAD-KOZ (*a zeu war-lerc'h ar buana ma c'hell e-pad ma 'z a Lan war-zu ennan*). — Lan !

LAN. — Va Zad ! (*En em vriata a reont ha sellout piz an eil ouz egile.*)

AN TAD-KOZ. — En em gavet out a-benn ar fin ! Eun disteraig out chenchet mezaoun ! ha da varo fuilhet a ro eun aer lakipod d'it... Met aman e teujo da nerz d'it buan en-dro ; p'out chomet dibistik eo brao. N'hon eus nemet trugarekaat an Aotrou Doue.

LAN. — Eun tamm gwanijenn (*sempladurez*) ha netra ken ; diou pe deir zizun gant bevans a zoare hag oun barrek ; gwad mat a zo, va zad. Al levenez da veza er gêr ganeoc'h-holl, an dra-ze eo ar gwella magadurez hag ar gwella louzou. Ha c'houi, va zad, boujant atao war a welan.

AN TAD-KOZ. — N'eo ket gwellat a ran ken, difazi d'it...

Beza 'c'heller ha beza bet,
Beza 'tao n'heller ket.

Gwaz a-walc'h-oun bet eur poent 'zo bet d'in, torret eo warnoun breman, evit-se ; an oad a permet paotr ! Pemzek e vezin da zerc'hent gouel Yan. Koulskoude pec'hed e ve

d'in klemm, braoik a-walc'h ez a ar bed ganen, va c'halon 'zo yac'h a drugare Doue hag ouz taol oun unan mat atao : va izili eo ha va c'hroaz-lec'h !... (*En eur ziskouez e groaz-lec'h.*) Alese eo oun dalc'het.

Met te, Lan, a dle kaout naoun ? moarvat out gleb... Dreb eun dra bennak 'ta ! poent merenn-vihan eo ganeomp. (*Mont a ra an Tad-koz d'ar bufed hag e teu gantan a bep seurt.*) Set' aman eun tamm jaritell, eur restad anduilh ; bara a zo ivez hag amann... n'eo ket d'ar c'here mont diarc'hen na d'ar c'houer chom hep tamm ! Eur banne gwin a vo kavet ivez da domma d'it. Berc'hed he doa lakaet a-gostez eun nebeut boutailhajou hini mat, da eva pa vijes deuet d'ar gêr. (*Mont a ra da gerc'hat eur voutail-had-win a zindan penn ar gwele.*) Dilhad da jench avat... az po bremaik pa erruo Berc'hed... (*Lan a zo staget da zribi ; Gaidig a jom e-kichen he zad.*)

LAN. — Ha Berc'hed ya ! d'ar marc'had eo aet mezaoun ?

AN TAD-KOZ. — Ya ; ar vaouez kaez ! Poania a-walc'h a ra, betek re zoken alies hag e rankan ober rebechou d'ezi. Re dik eo deuet da veza gant al labour, abaoe dreist-holl ma 'z peus skrivet e tlees dont d'ar gêr. Damant ebet ken d'he foan, atao ar memes respont : Pa zeuio Lan d'ar gêr e rank beza pep tra en etat. Klasket hon eus kaout eur mevel muioc'h met dao eo bet d'eomp ober hep ket. Warlene eo bet Berc'hed war-dro ar foenn ha war-dro an eost ; war ar vederez he deus ranket mont, mar plij, da dailha an dremmen. Nul oa d'in klask herzel outi. Ha goude eman ar vugale da entent outo, labour an ti da ober, ar pakajou da gas d'it... ar marc'had... n'ouzoun ket penaos eo padet ! M'hel lavar d'it, Lan, eur vaouez vat az poa dibabet ! an holl a ra fougeou ganti dre ar barrez. Hag evidoun-me, n'oar ket penaos ober re vrao ouzin ! N'eo ket stank seurt merc'hed-kaer !

LAN. — Ha c'houi, va Zad, ho peus ranket starnia adarre ! N'oc'h ket aet re skuiz ?

AN TAD-KOZ. — O ! n'eo ket me eo a wella kalz ar jeo ! N'oun ket evit mont da heul ar re all ken ; me a jom war-dro an ti da dalfasat ha da glevouz ouz al loened.

LAN. — Da bet eur e tle Berc'het digouezout er gêr eus ar marc'had ?

AN TAD-KOZ. — N'ouzoun ket a-walc'h ; met n'hell ket dale kalz ken.

DIVIZ VI

AR MEMES RE, CHEUN HA FANCH

CHEUN. — Ac'hanta Lan ! erruet out, pelloc'h ! (*Starda a reont an dourn an eil d'egile.*)

LAN. — Pa 'm eus gellet dispega ha kemerout penn-hent ar gêr n'oun ket chomet da glask neiziu, bez dinec'h ! dispega n'eo ket bet aes avat !

CHEUN. — N'oa ket re abred, han ! lavarout kenavo d'ar broiou-krec'h ? Hag aman oa gortoz d'it pell zo. N'eo ket c'hoaz al labour — e c'hellez kredi ne rankomp ket mont da glask ! — met aesoc'h e vez pa vez ar mestr ar gêr.

LAN. — Eun den out, Cheun, p'out chomet ganeomp e-doug ar brezel. Berc'hed a skrive d'in oa rekouret ganez. Petra 'fell d'it ? Kaer 'zo, eur vaouez n'he deus ket a-walc'h a benn evit kas eun tiegez en-dro. A-raok ar brezel n'oa ket bet kaer Berc'hed war-dro ar parkeier ha va zad en deus eun tammig oad. Diaes oa va spered gant kement-se. Met pa 'm eus gouezet oas deuet adarre davedomp d'ar C'hoad-Glas oun bet dizoursi. Tud fall 'zo war an douar... Tud vat a zo ivez a drugare Doue ! Bennoz Doue d'it, Cheun !

CHEUN. — Petra 'ri ! Me 'zo bet paotr-saout gant da dad-koz er C'hoad-Glas, mevel bras gant da dad, mevel koz ganez-te da-unan war an diwezadou... Va zonj a oa echui breman va buhez dichal ha didrabas em fenn-ti gant Kattell ; met pa zeuas Berc'hed d'am goulenn n'oun ket cho-

met da dorta nemet dont. Daoust ha n'omp ket bet d'ar wech evel tud ar memes ti ! N'em boa aon nemet rak eun dra : aon na ven ket bet gouest da ober ar pezh a c'horthozed diouzin. A drugare Doue eo aet ker brao ha tra al labour ganeomp en-dro ha chans a zo bet gant al loened. Breman e c'hello adarre ar bleiz koz distrei d'e loch.

LAN. — Gounezet ez peus eur bloavez bennak a ziskuilz met selaou ganen-me : er C'hoad-Glas e vezi atao er gêr ha pa gavi re hir da amzer deus war-dro aman da durlutat gant va zad. Va zad ne c'houlenn ket 'well ! Ha da blas az po atao ouz an daol. (*Da Fanch*) : Salud paotr-yaouank ! Te 'zo ganeomp ivez ?

FANCH. — Ya, Lan ! abaoe ar bloaz nevez ! (*Stardadenn daouarn.*)

CHEUN. — Heman, Lan, a zo mab da Ber an Touz eus a Benn-ar-Prad. Brao eo d'eomp p'hon eus gelllet e gaout. Yaouank 'eo c'hoaz met gwad a zo ha poania 'ra. (*Etre-daou int aet ouz taol... dribi a reont.*)

LAN. — Yac'h eo an dud ganeoc'h e Penn-ar-Prad ?

FANCH. — N'eus ket da glemm gant ar yec'hed breman. N'eus nemet va zad-kreiz ha n'eman ket a-walc'h war e du. Er goañv-man eo bet dalc'hmat etre e wele hag an tan. N'eo ket yaouank ken kennebeut.

LAN. — Da dad a zo bet o labourat er C'hoad-Glas meur a wech ivez, diouz an deiz a-wechou, awechou all e gobreost. N'oa ket kalz da vont warnan ! mar dout kouls paotr ha da dad n'eo ket fall ! Hag eur marvailher kaer evel ma oa !

AN TAD-KOZ (*da Lan*). — Lan ! diskarg eur banne ben-nak 'ta !

LAN. — Ya, gwir eo ! eur banne ne ray ket a zroug ; hirio 'zo eur dervez a levenez evidoun. (*Diskarga a ra, steki a reont o gwer an eil ouz eben.*)

CHEUN. — Yec'hed mat d'it Lan ! ha d'eoc'h Fransa !... Fanch !

LAN. — Ha d'eoc'h ivez ! Breman p'oun deuet d'ar gêr, arabat ober bilou.

AN TAD-KOZ. — D'ho yec'hed !

FANCH. — Yec'hedou !

LAN. — Ha te Gaidig, n'ez peus banne ebet ? Hirio e rankezh trinka ganeomp !

GAIDIG. — Eur banne bihan, neuze, gant dour e-barz. (*Gaidig a drink gant an holl.*)

CHEUN. — Petra, Lan ? Ha du-ze ivez, penaos eo bet ar vuhez ganez ? Lavar eun dra bennak d'eomp 'ta ! N'ez peus ket bet a naon da vihana ?

LAN. — Er penn-kenta hon eus graet kofig-moan avat ! Treut oa ar bevans, soubenn an tri-zraig : dour, holen ha baraig ; ha c'hoaz e-lec'h bara e veze a bep seurt en dour : heterabez, irvin, ruta, linad — ha me oar me ! Pell omp bet a-raok reseo pakad ebet ha ne dae ket an naon diou-zomp. Goude-ze, neuze, omp staget da reseo pakajou, Pebez plijadur pa zigouezent ! Tri vreizad oamp en eur gichen, gwele ha gwele pe torchenn ha torchenn ma kirit : unan eus ar C'hastel-Nevez, unan all diouz kostez Montroulez ha me ; war zaou-hanter e vezomp gant kement a zeue d'eomp. Terri a raemp hon naon en derveziou-se. Blaz vat a gavemp gant boued ar gêr, kredit ac'hanoun, e-skoaz ar pezh a veze servichet d'eomp ! ha ne veze ket labour bell gant pep pakad !

AN TAD-KOZ. — Hano 'zo ganez eus ar pakajou, en em gavet-int holl ganez ?

LAN. — N'eus ket manket ral a hini, a gay d'in... daou ar miz am-beze, a-wechou tri... Goude-ze oun aet da labourat en eun atant, eun tiegezh bras avat, bordik daou-c'hant dervez-arat, douar-labour ar c'halz anezo. An ozac'h a oa er brezel, pevar a vugale d'ezan koulskoude. Eno eo bet gwelloc'h ar gundu, boued groz mar kirit met leun ar c'hof a veze. Ne gaven ket ken hir va amzer, labourat a raen kalonek evit klask mouga klêved ar gêr. A-wechou

e krede d'in beza er C'hoad-Glas, e park-ar-Parvanou pe e prad-ar-Maner. Desket em boa brezoneg d'ar c'hezeg ha goût a raent diouz « So » ha « dic'ha » kouls hag ar gazeg yell. Allas ! pebez distro pa zeuen ennoun va unan ha pa sonjen edon o labourat douarou ar re all ha c'houi aman herr gant ho labour ! Douar mat 'zo du-ze met n'oa ket labourer na trempet !...

Asa ! met ne evit ket ! emao'h o prepar mouga ! (*Dis-kargà a ra.*)

Hag aman, Cheun, e pe-seurt stuziou eman an douarou ganeomp ? E serr dont gant va hent oun tremenet dre bark-ar-Stivel hag oun savet war ar c'hleuz. Mezaoun ne vo ket re fall an eost ?

CHEUN. — Doare vat a zo, kolo a vo... ar pennou avat am eus aon a ve skanv. Rabad a vo war varlene. Arabat beza souezet ; n'euz ket gellet kaout kalz a ludu hag an douar a zo re goz da zonzal ober goap anezan. Sikour fall oamp ivez e skoaz a-raok ar brezel ha n'euz graet nemet ruilh an douar. Poania hon eus graet avat Fanch ha me ; ha Berc'hed 'ta ! Mez a rae d'eomp ! N'eo ket evit ober plijadur d'it eo met eur boagnerez eo da wreg. Al labour a ranke mont war a-raok evel pa vijes bet aze ; ne gleved nemet an diskan-man : petra 'lavarao Lan pa erruo ma ne vez ket graet an dra-man, ma ne vez ket graet an dra-hont... Gras a gavo p'out en em gavet, ha me ivez !

LAN. — Warc'hoaz e rankan mont da ober eun dro d'an douarou. Hag al loened ? Deomp 'ta, da ober eur gwel d'ar c'hreier. (*Sevel a reont.*)

GAIDIG (*a oa e toull an nor*). — Per ha Yannig o tont d'ar gêr eus ar skol ! (*D'he breudeur*) : Deuit 'ta buan ! erruet eo Tad er gêr !

DIVIZ VII

AR MEMES RE, PER HA YANNIG

YANNIG HA PER (*a zigouez war an treuzou, o zad a ya war-zu enno*). — Va zad !

LAN (*en eur bokat d'e zaou vab*). — Echu eo ar skol paotred ! N'edoc'h ket e sonj va c'havout er gêr han !

PER. — Pas hirio nann ! Met mamm he devoa lavaret d'eomp e tleec'h en em gavout en deizioù-man.

YANNIG. — Peur oc'h erruet Tad ?

LAN. — O-paoëz erruont sell ! N'em eus ket bet amzer da vont betek ar c'hreier zoken. (*Da Ber*) : Te a gomans dibrada diouz an douar Per ! Pa zeuio an hanv e c'helli ober paotr ar fouet. Labourat mat a rez er skol ?

PER. — Da eil emaoun er c'hlas, va zad.

AN TAD-KOZ. — Per a boagn ha spered en deus. An Aotrou Person a garfe ez afe d'ar skolaj er bloavez a zeu. (*Da Ber*) : Kontant e vijes da vont ?... Marteze ez i da veleg evel Tonton Jean-Marie.

PER (*gant eur zao d'e skoaz*). — N'ouzon ket !

LAN. — Ha te Yannig ? Te a ray eur paotr-teo mezaoun ! Deski mat a rez ivez ?

YANNIG (*respont ebet nemet eun hej d'ar penn gant eur mouz c'hoarz*). —

AN TAD-KOZ. — O ! heman avat n'eo ket sot kennebeut nemet n'eo ket ken trêet gant ar studi. Muioc'h a zarbar en deus gant al labour-douar. E lorc'h eo sevel er c'harr ha mont d'ar park gant Cheun. Daou gamarad bras int. Goût a ra ober goap ouz ar mevel koz evel ma kar ha pa vez fiziet ar rejennou ennan, neuze avat e vez en e jeu.

(*Etre-daou eo staget ar baotred gant o merenn-vihan.*)

LAN. — Labour a gavo er C'hoad-glas. (*Da Yannig*) : nemet e rankez gouzout va faotr, n'eus mui ezomm a ezen-kornek da gas an atanchou en-dro ; ar re-ze a zo mat da

skuba ar straejou e Paris pe da zarbar ar vansonerien e kêr. Da genta e ranki kaout da zertifikad ! Ha goude, tri pe bevar bloaz e skol al labourerez-douar en « Nivot » e Lopérec. Desketoc'h-desketa e tle beza al labourer-douar ; e-hent-all e chomo e fri er wask evel a-raok hag e vo graet anezan ar pezh a garor.

Breman, ma 'z a Per da veleg — ha n'eo ket me a enebo, pell diouz eno ! — Te Yannig a jomo da vestr er C'hoad-Glas war va lerc'h...

YANNIG. — Tad ! Gwelet ho peus an torrad konifled bihan am eus bet ?

LAN. — N'em eus ket bet amzer c'hoaz, paour-kaez paotr !

PER. — Breman e talc'hoc'h ho paro atao Tad ?

LAN. — O ! Ne rin ket ! Warc'hoaz vintin, abred, e vezint diskaret !

PER. — Boued az peze da zibri du-hont ivez Tad ? Me a veze o kas ar pakajou d'ar vourc'h.

LAN. — Sklaer eo d'it avat n'oun ket chomet hep tamm ! Euruzamant em beze pakajou eus ar gêr ; anez e ve bet brasoc'h va fri eget ne deo !

GAIDIG (war an treuzou). — Tad ! Mamm o tont d'ar gêr ! (D'e mamm) : Mamm ! Mamm ! Tad 'zo en em gavet er gêr !

LAN (a zav diouz an daol hag a red er maez). — Berc'hed !

(Ar ridoch a gouez.)

EN EM GARIT...

Pez-c'hoari en eun arvest (evit ar merc'hed)

ROLL AR C'HOARIERIEN :

Seza ar Puns, ar vamm-goz : 70 vloaz.

Katell ar Puns, ar vamm : 40 vloaz.

Gwenola : 16 vloaz,

Monig : 12 vloaz,

Chanig : 10 vloaz,

Annaig : 8 vloaz,

Marc'harid ar C'han, merc'h-vihan da Seza : 20 vloaz.

Soazig ar Roudour, eur gamaradez da Vac'harid : 19 vloaz.

An abadenn a dremen e Pariz, e ti Gatell ar Puns, er gegin.

DIVIZ I

Monig Chanig

SEZA, KATELL, SAG, PAOL, ANNAIG

(Pa zav ar ridoch eman ar vamm-goz war hec'h azez, e-kichen ar prenest oc'h en em gompren, evel mantret, eur chapeled a zo en he dourn ; Katell a zo o ferat (o tistenn), Monig ha Chanig o skriva pe o lenn ; Annaig o c'hoari gant he fapaig (he merc'hodenn). Eur pennad e chom an holl dilavar.)

SEZA (*da Gatell*). — N'ez peus bet lizer ebet eus ar C'han hirio, Katell ?

KATELL. — Nann ! eur pennad 'zo n'eo ket stank ar c'he-lachou a zigasont d'eomp.

(*Dilavar an dud adarre, pep-hini gant e labour.*)

SEZA. — Foen brao a vo bet graet er bla-man, ma chom am amzer.. hag an eost a vo abred... N'eo ket trubuilh he do adarre Mari baour !... Hag ano ebet atao d'ar brizonierien da zont d'ar gêr... Eüruzamant eman ar verc'h henan, Mac'harid, en oad da zikour he mamm...

KATELL. — Ni a zo brao d'eomp c'hoaz pa zigas deomp tintin Mari eur pakad bep an amzer ; anez n'ouzomp ket penaos e padfemp ! N'eo ket gant ruta ha kaol-irvin e vo maget an dud !...

SEZA. — Ha betek peur e pado !... Sonj am eus e-pad ar brezel all... Yaouank oas c'hoaz d'an ampoent Katell. (*Kloc'hig an nor a zon.*)

KATELL (*da Vonig*). — Kae da zigeri 'ta Monig !... Gwenola o tont endro... N'eo ket bet pell ! Tro wenn adarre moarvat !

DIVIZ II

AR MEMES RE, GWENOLA

GWENOLA (*o tont tre*). — Mat ! mantrus eo ! Kazeg adarre ! ouspenn hanter-kant a oa em raok war ar renk p'oun en em gavet ! Marteze ez eus servichet amann d'an ugent kenta, pe evel-se, hag echu !

« Plus de beurre, plus de fromage, plus d'huile ! » Atao an hevelep diskan. Setu aze an tikejou !... (*Teurel a ra an tikejou war an daol*)... Emichans a rin gwelloc'h foar war-c'hoaz gant mont abretoc'h da zerc'hel tro. Merc'hed a oa

hag a skanvbenne : « Les sales paysans ! Ils bouffent tout leur beurre et ils laissent le pauvre peuple crever de faim. Ils en trouvent meilleur prix au marché noir ! Mais attendons que ceux-ci soient partis, nous aurons notre revanche. » Hag eun aridennad rebechou a bep seurt... N'em eus ket rannet eur ger nemet skampa d'ar gêr ha koulskoude em bije gelet lavarout d'ezo pegen mat eo tintin Mari evidomp-ni.

(*E keit-se he deus tennet he zog ha paket peg en eul labour dantelez pe vrouderez.*)

AR VAMM-GOZ. — Aes eo teurel ar bec'h war al labourer-douar ! Estregetan a zo penn kaoz eus an diouer-bevans er c'hêriou ! Me 'm eus sonj p'edon o chom er Puns ne veze ket lakaet re a amann da frita ar c'hrapoez !...

GWENOLA (*a gan e serr labourat*) :

O Breiz-Izel, o kaera Bro

En da enor me gano

Lonlene, lonleno, lonla,

En da enor me gano. (1)

Me gar da gleuziou alaouret

Da douriou danteleze.

ANNAIG (*d'he mamm*). — Mammig, eun tamm bara mar plij !

KATELL. — Asa ! Annaig, emaut o paouez diouz da lein. (*Da verenn.*) Ha bet yod kerc'h d'it ha krampoez gwiniz-tu !

ANNAIG. — Ya ! mat oa ar c'hrapoez, naon am eus evit-se !

(1) Evit an ton gwelit « Barzaz ha Soniou », gant Paotr-Treoure.

KATELL (*outi hec'h-unan en eur gregi er vouchenn hag o trouc'ha eun tamm bara*). — Poan a vo adarre o terc'hel bara d'ar re-man betek fin ar miz ; n'eus mui na bleud kerc'h na bleud gwiniz-tu ; aet dija an dri farz eus an tikejou ha n'eo ket c'hoaz hanteret ar miz. Tamm kig ebet da gaout kouls lavarout hag ar patatez o vont bihan ! Da goan e rankin ober kuign-patatez d'ezo, an dra-ze a stank da vihana. Ar paour-kaez tad eo ! n'hell ket harpout ma ne vez ket bevet krenv. (*Da Annaig.*) Del ! awalc'h az peus ?

ANNAIG. — Ya, mammig ! Bennoz Doue d'eoc'h !... (*Trei ha distrei a ra he zamm bara... Goude eur pennad nec'ha-mant.*) N'eus netra da lakaat warnan ?

AR VAMM. — Netra ! va merc'hig paour ! Goût a rez eo aet tout an amann ! Nemet hag eun tamm konfitur bennak a ve chomet ouz hon dilerc'h... (*Klask a ra er bufed*)... Netra ! n'eus netra. (*Pokat a ra d'he merc'h ha gant eur mouz c'hoarz.*) Met bez dinec'h ! Gant bara zec'h a teu bras !

MONIG (*a zo savet hag aet da gaout e vamm, goulenn a ra eun tamm, mezek*). — Mamm, me 'm bo eun tamm ivez...

AR VAMM. — Te az peus avi ouz da c'hoar vihan adarre neketa ? glaourenneg ! Te avat a c'hortozo betek koan ! (*Monig a zisro d'he flas, sioul.*)

AR VAMM-GOZ. — Katell ! Ro eun tamm da Vonig ivez-ta ha da Janig ; ne gavez ket int eun tammig chenchet (*kastizet*), Monig dreist-holl. Oc'h ober o c'hresk eman ar vugalese hag ar skol a jach warno. Truezus eo memes tra e rankfed tailha ar bara d'ar vugale ! Ni n'eo ket henvel, ni a zo graet hor c'hreiz pell 'zo. N'oamp ket pinvidik er Puns gwechall, nebeut a friko hag a zilhadr brao, labour kement ha ma kared... A drugare Doue n'eo ket bet ret tailha ar bara d'eoc'h. Poent eo e teufe an hanv ma 'z ay er re-man da grenvaat d'ar Puns e-pad daou pe dri miz. Petra 'fell d'it, ro atao, keit ha ma pado e pado !... Santez Anna yen-

niget da gaout truez ouzomp ! (*Trei a ra e chapeled en he dourn.*)

AR VAMM (*a ra eun tamm bara da Vonig ha da Janig*). — Delit 'ta neuze ! Nemet e tlefec'h kompren ne dleer ket dibri e-tre ar prejou pa 'z eus kement-all a boan o kaout bara. Peur e teuio skiant d'eoc'h 'ta ? (*Da Wenola*) : Te az po eun tamm ivez ?

GWENOLA. — Bennoz Doue d'eoc'h, mamm, n'em eus ket a naon... Gwir eo ez eus eun tachad-mat abaoe n'eus deuet pakad ebet digant Tintin Mari. Kazimant sur ne zaleo ket.

AR VAMM. — Konta a reer e teu diaesoc'h-diaesa kaout traou du-ze ivez. Gouarnamant hag all a zo o tiframma digant al labourer-douar kement en deus. Kalz amzer n'o deus ket kennebeut er mare-man da gaout soursi ganeomp, mare ar foenn anezi.

AR VAMM-GOZ. — Mari he deus trabas ivez gant he daou vab prizonier. Setu aze daou all hag a zo treut ar zou-benn ganto diouz ma lavarar. Ma n'o defe ket pakajou eus ar gêr !... Ha pegen digonfort d'ezo beza pell diouz ar vro ha diouz o zud !... Arabat eo d'eomp klemm a-raok kaout poan ! Ha c'hoaz Per a zo breman o labourat war ar maez, ne glemm mui gant an naon. Kement-se atao eo !

(*Kloc'hig an nor a zon.*)

AR VAMM. — Piuou bennak a zeu d'hor gwelout ? Kae da zigeri 'ta Gwenola !

DIVIZ III

AR MEMES RE, MARC'HARID HA SOAZIG

GWENOLA (*o tigeri an nor*). — Sell piou ! Te eo Mac'harid !

MARC'HARID (*o tont tre, Soazig ouz he heul. E-giz ar Vro int gwisket kaer o-diou*). — Gwenola ! (*Pokat a reont an eil d'eben.*)

(*Marc'harid a ya da gaout he mamm-goz.*) Doue ho pen-

nigo ! mamm-goz. Penaos eman ar bed ganeoc'h ? Mezaoun oc'h deuet da blac'h-yaouank adarre !

AR VAMM-GOZ. — Bennoz Doue d'it, Mac'harid ; dre c'hras Doue ne dan ket fall breman. Ha te ? Liou mat a zo warnout, war goantaat ez ez atao ha war furaat ivez n'oun ket nec'het.

MARC'HARID (*d'he moereb*). — Ac'hanta, Tintin Katell, deuet oun d'ho kwelout a-benn ar fin... Me gonte avat e vijen bet kollet o tont eus ar gar betek aman ; a c'houlennoù ez eer a-bell, gwella pezh 'zo ; met ranket em eus goulenn va hent pemp pe c'houec'h kwech.

GWENOLA. — Ma karjes beza skrivet d'eomp ivez ! E vijen bet aet d'ho tiambroug betek ar gar.

MARC'HARID. — Ha Monig ! Atao gant he c'haierou hag he leoriou ! Emichans ne vezi ket korbellek evit da zertifikad !

MONIG. — N'ouzoun ket ! Ar pezh 'zo sur eo e ve gwelloc'h ganen beza o tiwall ar zaout e prajeier ar C'han.

MARC'HARID. — Ha te Janig, n'eo ket er bloavez a zeu eo emañ gant da bask kenta ? Tintin Mari a ra mat he zonj da zont da Baris evit pask kenta he filhorez.

ANNAIG (*a zo chomet da nec'hi eur pennad ; dianaout a ra Marc'harid ; a greiz pep kreiz*). — Maren ! Maren !

MARC'HARID. — Va filhorez vihan ! Annaig ! Sell 'ta petra am eus digaset d'it ! (*Rei a ra madigou da Annaig ha eur zuterez.*) Da biou out mignon ?

ANNAIG. — Da Varen ! (*Hag e c'houez en he zuterez.*)

MARC'HARID (*en eur drei war-zu Soazig*). — N'em eus ket lavaret d'eoc'h c'hoaz piou eo houman : Soazig ar Stank.

SOAZIG (*da Zezù*). — Mamm-goz, n'ho peus ket anavezet Fanch ar Peul, a oa o chom er Roudour ? Me 'zo merc'h vihan d'ezan.

AR VAMM-GOZ. — Anavezet mat em eus da vamm-goz, Chan ar Roudour ; bloaz pe zaou oa yaouankoc'h egedoun ;

alies omp bet er frikoioù hag er pardonioù asambles. Beo eo atao ?

SOAZIG. — O ya, mamm-goz, n'eo ket gwellaat a ra, e c'hellit kredi, dalc'het eo eun tamm gant ar remm. Er goañv-man he deus bet eur gwall stokad, breman eo barrek adarre.

MARC'HARID. — Deuet omp hon-diou d'eur vodadenn a zo e Paris evit merc'hed yaouank kristen ar maeziou, an Y. K. A. M. evel ma lavaromp. An Aotrou Person en doa c'hoant e teujen o veza m'emaoun e penn strollad ar barrez, penn-renevez mar plij ! N'edon ket kalz e-chal da zont va unan hag eo deuet Soazig ganen.

Tonton Bi n'eman ket er gêr ?

AR VAMM. — O labourat eman ! Brao eo c'hoaz p'en deus labour breman. Goût a rez eo bet dilabour e-pad eur miz. Diaes oa e benn ha deuet oa da veza sinkanus. War-dro 6 eur e teu d'ar gêr.

MARC'HARID. — Met n'eo ket a-walc'h chom da varvailhat. N'oc'h ket maro gant an naon aman c'hoaz ? A bep seurt a vez kontet war ar maez diwar-benn an dienez er c'hêrioù. Deuet eus ganen peadra d'en em zikour ouz an naon e-pad eun nebeud dervezioù. Gwelomp 'ta petra 'zo er pakajou-man. (*Lakaat a ra ar pakajou war an daol hag e tiskoulm ar fiseleñ ; an holl a zo o fri tost, mamm-goz hag all.*)

AR VAMM (*da Varc'harid*). — Arabat eo d'in ankounac'haat paea da vamm hirio evit kement he deus digaset d'eomp.

MARC'HARID. — Ganen eman ar paper evit ar pakajou ho peus resevet ; va mamm he deus lavaret d'in n'eman ket da lakaat war gont ar pezh a zigasan hirio ; an dra-man a zo war ar marc'had.

GWENOLA (*dilaseta he deus eur pakad*). — Eun tamm kig-moc'h mogedet ! Hag eur mell tamm ! Eiz lur bouez da vihana !...

AR VAMM (*memes tra*). — Amann ! Bordig pevar lur.

MONIG. — Eun anduilhenn...

CHANIG. — Krampoez !...

KATELL. — Eun hanter-torz bara-gwenn !

MARC'HARID. — Eul lapin hag eur yar lazet dec'h.

SOAZIG. — Ganen-me eus deuet eun dra bennak ivez (*frezuz a ra he fakad d'he zro*). Eur tamm kig moc'h ha diou zousenn viou.

AR VAMM. — Breman avat n'emaomp ket fall ganti. Bi a vo lorc'h ennan bremaik (*da Varc'harid ha da Zoazig*). Chom a rit ganeomp eun dervez bennak ? Kavet e vo an tu da zevel eur gwele d'eoc'h er gambr-dribi.

MARC'HARID. -- N'hon eus nemet daou zervez ; prez labour a zo, goût a rit eman poent ar foenn ha eo berr ar zikour. Ma ne vefe ket bet deuet an Aotrou Person betek an ti, ral eo em bije gellet dont !

AR VAMM-GOZ (*d'he merc'h*). — Breman avat e c'hellez lakaat eun tamm amann d'ar vugale baour-se war o bara.

AR VAMM. — Evel just ! dioueri pa vez, dioueri pa ne vez ket, an dra-ze a zo dioueri atao neuze. Hag eur banne kafe a vo graet ivez peogwir eo digouezet Marc'harid ha Soazig.

GWENOLA. — Mamm, ni a zo o vont da ober eun dro da c'hortoz ma vo prest ar c'hafe.

ANNAIG. — Maren ! Maren ! Hag al leue bihan ? bras eo breman ?

MARC'HARID. — Gwerzet eo, Annaig ! Met pa deui d'ar C'han en hanv-man e vo eun all, unan ruz gant eur bailh gwenn.

(*Sellout a ra en-dro d'ezi, da Gatell*.) N'emaoc'h ket fall aman ! (*An teir flac'h yaouank a ya da welout ar c'hrampoeier ; dont a reont endro*.) Bihan eo an toullou ha bern war vern emaint ; naet ha brao eo pep tra avat. Ma ne ve ket bet gwintet ken uhel ho ti ha ma ve bet parkeier ha prajeier tro-war-dro em bije bet avi ouzoc'h.

GWENOLA. — Alo ! merc'hed keiz ! nebeutoc'h a ranelerez ha yao !

(*Mont a ra an teir flac'h yaouank kuit*.)

DIVIZ IV

AR MEMES RE NEMET AN TEIR FLAC'H YAOUANK

AR VAMM. — Mamm-goz ! rekouret omp ha mall am eus da welout Bi o tont d'ar gêr. Tintin Mari zo ar vaouez vat evelato hag he merc'h, Marc'harit, pebez plac'h a feson ! ha laouen evel ma 'z eo ! ha labourerez ! ha kalon vat evel m'he deus ! Ne vo ket diaes da fortuna ha ar paotr-yaouank a zimezo ganti a ray eun taol kaer.

AR VAMM-GOZ. — Marc'harid a denn kenan d'he mamm. Ma oufe tud Paris ar boan a gemer ar merc'hed war ar maez evit kas o atanchou en-dro da c'hortoz distro ar brizonerien ne ve ket ker bras-se o genou. Emaer aman dalc'h-mat oc'h ober goap eus an dud diwar ar maez, o tiplapa a bep seurt teodajou ganto. Petra eo tud Pariz, ar c'halz anezo, nemet tud ganet ha savet war ar maez ? Petra o dije da zribi anez ma ve al labourerien-douar o terri o c'horf bemdez en o fakeier ! Eur vez eo klevout ar pez a glever ! N'o doa nemet chom war ar maez neuze mar deo ken ebat-se an doare gant al labourerien-douar ! mar deo ken avius-se o stad ! Atao em eus lavaret : chomit war ar maez, bugale ! poan a zo, ne lavaran ket, met e-serr ar boan hag al labour e kaver yec'hed hag eürusted.

AR VAMM. — Monig ! Daoust ha ma skrivfes eul lizer da Dintin Mari evit he zrugarekaat ha kas d'ezi eus hon doare.

MONIG. — Me ne ouezin ket petra da skriva d'ezi !

AR VAMM. — Me a lavaro d'it !... Prest out ? (*Monig a gemer paper-lizer*.) Laka da genta : Tintin Mari... Breman, kemer eul linenn pe ziou izeloc'h.

Va mamm ha va zad a lavar d'in skriva d'eoc'h eul lizer... Mont a ra ganez ?

MONIG. — Re vuan ez it, Mamm !... a lavar d'in skriva...
ha goude ?

AR VAMM. — Skriva d'eoc'h eul lizer... (*Mont a ray
evel-se, goustad, ar vamm gant al lizer.*)

Evit lavarout d'eoc'h omp yac'h. Eur zouezenn vras hon
eus bet hirio o welout Marc'harid oc'h en em gavout
a-greiz-pep-kreiz gant Soazig ar Roudour, ganto pakajou
a bep seurt traou mat enno. Berr oa aet ar boued ganeomp,
rekouret omp evit eur pennad. Va zad a labour breman.
Mamm-goz a zo yac'h atao, an tamm paz he doa paket a
zo aet kuit diouti hag he gar a zo maro ar boan enni. Mall
hon eus da vont d'ho kwelout pa deuy an eost. Diaes kenan
eo kaout netra. Gwenola a zo livet fall eur pennad a zo ;
n'eo ket klanv nemet d'an oad-se e trebje lod diou.

Rôet e vo da Varc'harid priz an daou bakad diweza hon
eus resevet diganeoc'h. Marc'harid a lavar ne fell ket
d'eoc'h kemerout netra evit ar pezh a zo deuet ganti hirio.
Re vat oc'h Tintin Mari ! Doue ho paeo ! Er bloavez a zeu
e rankoc'h dont da Baris evit Pask kenta Chanig : ma ne
deuit ket va zad ne vo ket kontant...

MONIG. — Echu eo ?

AR VAMM-GOZ. — Laka 'ta c'hoaz : Ni a bedo evidoc'h,
evit ma teuo Per ha Yann d'ar gêr ar c'henta 'r gwella
evit ho sikour. Emichans ho peus kelou mat diouto o-daou,
atao.

MONIG. — Ha da echui mamm ?

AR VAMM. — Laka : bep a bok start digant an holl.

Ha breman, buan d'ar post ! Evel-se ec'h en em gavo al
lizer er C'han a-raok Marc'harid.

AR VAMM-GOZ. — Klaer eo gwelout unvaniez ha karantez
etre an holl vugale. En em garout, en em zikour eo lezenn
an douar ; lezenn Hor Zalver eo ivez ! Trugarez d'eoc'h,
Aotrou Doue, da veza rôet d'in bugale vat ha bugale vihan
karantezus ha fur evel ar re-man.

(*Ar ridoch a gouez.*)

MEZENN HA SITROUILHEZEN (1)

Eur zitrouilhezenn

A zo eur pikol aval melen,
Ken teo, ken bras ha penn eun den,
Hag a zav war eur gorzennig zister
A-rez an douar er parkeier :

— « Asa ! 'lavare Yann ar Roue,

O klask petra edo 'ta Doue,
Pa 'n deus laket eur seurt blonegenn
Da zevel war eur yeotenn ?...

Me 'm bije staget hounnez kentoc'h

Ouz an dero 'welan a-hont larkoc'h !...

Eun aval bras euz eur wezenn deo,

Hag ez afe mat an traou en-dro !...

E lec'h ar mez,

A welan a-hont ouz ar gwez,

Koz-braoigou, n'int ket brasoc'h 'get eur veskenn,

Me 'm bije gwriet ar re-ze 'fouez ar melchen.....

Asa ! penaos 've ket deuet an Aotrou Doue

Da c'houlenni kuzul diganen-me !..... »

E c'hellit kredi, neb en deus kement-se 'spered

'Pad an noz ne c'hell ket kousket !.....

Ha setu Yann êt d'ober eur vorenn

War greiz e gein dindan eun dervenn.....

— Brrrrr ! eur barr-avel deuet da c'houeza

1) Ar rimadell-man a zo kaer da veza displeget gant eur verc'hig
pe eur paotrig. El levr « *Barzaz ha Soniou* » savet gant Paotr Treoure-
e kavoc'h eur bern rimadellou evel-se ha soniou ouspenn.

A lak da goueza

Eur bern mez a douez an deliou

War fri Yann ha war e c'henou.

Sapristi ! kignet e fri ! Rostet e varo

Borgnet e lagad, leun-c'hoad e vourrou !

Ha paotr-Yann war e gilhourou :

— « Set' ama 'vat er gempenn,

Emezan 'n eur skrabat e donenn !

Kerkent all 'oan lazet ganto,

Ar c'hoz-beskennou divalo !...

Ha c'hoaz eo gras d'in, emezan, toneilhe !

Ma vije bet kouezet sitrouilhez a gen-uhel-ze,

O doa bet pladet va fri d'in-me ! »

Ha Yann neuze o vont d'ar gêr

En eur lavaret e Bater :

— « Hop ! emezan ! Doue 'ra mat ar pezh a ra, mardouen !

Ha ni n'omp ken 'met genaouerien ! »

